



ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor



Kristen ha Breizad da virviken

JUDIKAEL

Myster Kristen en eun arvest



SANT-BRIEG

Mouleriez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner

—
1917

33 D
ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor




Kristen ha Breizad da virviken

JUDIKAEL

891
682

Myster Kristen en eun arvest



SANT-BRIEG

Moulerez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner

—
1917

Diocèse de
Quimper & Léon
Quimper - Léon

Document numérisé en 2016

ARGUMENT

Après avoir remporté une brillante victoire sur les Francs, Judikael revient à l'abbaye de Gael, où il était moine, avant de monter sur le trône de Bretagne. Saint Eloi vient l'y retrouver et conclut avec lui un traité de paix et d'alliance au nom du roi des Francs. Sur ces entrefaites, Saint Méen, Supérieur de l'abbaye, donne asile à Gweneal, jeune esclave gravement malade, dont les mains sont enchaînées et ensanglantées. Hoel, prince impie et cruel, le poursuit jusque dans cet asile sacré, et au moment où il va s'en emparer, il tombe frappé par la main de Dieu. Judikael au contraire, dans son ardente charité, lave le pauvre captif, panse ses plaies, et l'introduit dans son humble cellule.

Or Gweneal reparait, tout à coup, sous la ravissante figure de Notre Seigneur Jésus-Christ à l'âge d'environ quinze ans, et comme nul ne l'approche sans approcher en même temps de la grâce sanctifiante, Hoel se convertit. avant de mourir et Judikael reprend, pour toujours, sa robe de simple moine dans le monastère de Gael. (1)

(1) Voyez, dans Albert-le-Grand, la vie de Saint Judikael et celle de Saint Méen.

TUD AR MISTER

JUDIKAEL, *roue Breiz.*

AR C'HOUNT KERNE, *ofiser kenta Judikael.*

SANT ALAR, *eskob, kannad roue ar Franked.*

RADBER, *ofiser frank ouz e heuilh.*

SANT MEVEN, *abad manati Gael.*

KOLOMBAN, *menec'h e manati Gael.*

HERVE

GWENEAL, *paotr yaouank 15 vloaz.*

HOEL, *prinz a Vreiz, fall ha kriz.*

Daou zoudard oc'h heuilh Hoel.

Ofiserien.

Menec'h.

*An dra ma a dremen e Breiz, e manati Gael.
Eun daol. Kadoriou ha bankou.*

KENTA DIVIZ

MEVEN, KOLOMBAN, HERVE

An tri en o za, lozpedi

MEVEN

Doue an Tad, doue ar Mab, doue ar Spered
Santel! Treinded sakr o veza eun Doue hep ken, ni
ho ped a greiz hor c'haloun evit ma pijs gant ho
madelez sellet ouzomp.

HERVE HA KOLOMBAN *a unan*

Evelse bezet great!

MEVEN

Ni ho ped a greiz hor c'haloun evit Breiz, evit
ar vro a garomp. Enebourien Breiz en o deus
c'hounnar, hag evito da veza kristen evel domp, fel-
let eo bet dezo sevel a enep d'eomp, ha laerez douar
sakr hon tadou koz. Doue holl c'haloudad ho
pezet truez ouzomp.

HERVE HA KOLOMBAN *a unan*

Evelse bezet great!

MEVEN

Bez'ez eus bet, Aotrou Doue, elez santel hag a
zo chomet leal en ho kenver. An aotrou Sant
Mikeal venniget, o tougen en e zourn, eur c'hieze
great gant luc'hed, en deus stlapet an elez fall en

ifern. Doue krenv ! Doue ar brezel, ni ho ped a greiz kaloun. Ra vezimp ni, henvel ouz an elez vat. Ra vezo hor roue Judikael henvel ouz Sant Mikeal. Ra veze e gleze treac'h d'ar Franked.

HERVE HA KOLOMBAN, *a unan*

Evelse bezet great !

MEVEN

Roit d'eomp, dreist holl, ha d'ar Vreiziz karet, eur vuez santel war an douar, hag ar vuez a bado da viken er baradoz.

HERVE HA KOLOMBAN, *a unan*

Evelse bezet great !

An tri a ra sin ar groas a unan.

MEVEN

Ha petra ouzoc'h a nevez, va bugale geiz, diwar benn an emgann ?

KOLOMBAN

Nebeud a dra, va zad. nemet m'hon eus klevet mintin ma, Herve ha me, o labourat er parkeier, trompilhous o seni kaer warzu ar zao heol.

MEVEN

Ha n'ho peus ket gwelet piou a vije o seni ?

HERVE

N'hon eus ket, ha n'edomp ket evit hen ober a dreuz da goajou tenval Bresilian, a en em astenn tro war dro da vanati Gael.

II DIVIZ

AN HEVELEP RE. AR C'HOUNT KERNE

AR C'HOUNT

Aotrou Meven me ho salud, ha digas a ran d'eoc'h kelou mat a berz hor roue Judikael.

MEVEN

Gounezet en deus ? treac'h eo d'ar Franked ?

AR C'HOUNT

Treac'h a grenn.

MEVEN

Ra vezo benniget Doue ar gristenien.

KOLOMBAN

Livirit d'eomp, aotrou kount, e berz gomzou, pe naos e c'hoarvezas ar gounid.

AR C'HOUNT

Laouen o c'h hen ober. Eat e oamp kuit pell dioc'h Breiz, da c'haloupat warlerc'h ar Franked-a heskine ac'hanomp, evel a ouzoc'h pell e oa. Kerzet a reamp noz deiz a dreuz da Vro C'hall, dindan ar glao puill o koueza, dindan an avel vras o trouzal warnomp. Goude eiz dervez bale. ar re a gerze en hor raok a zeuas en dro, davedomp, da lavaret edo ar Franked kuzed en eun hent doun, tost da gear Laval. En eun taol krenn ni a yeas di, oc'h en em lakaat en dro d'an hent doun ze. Paket e oa ar Franked, war dro pevar mil anezo. Savet

e oa hor c'hlezeier hag hor pennou-baz evit o flastra
evel pa ve eun toullad lapined e vent.

HERVE

Hag o flastra ho peus great?

AR C'HOUNT

N'hon eus ket. Hor roue santel Judikael, mat
evel ma'z eo atao, a viras ouzomp na laz Kemp ane-
zo, hag e c'houlennas ouz o c'habiten kenta petra
a raje. Hennez a lavaras da Judikael e vije kaset
d'ezan dizale, eur c'hannad a berz roue Bro C'hall,
evit goulenn digantan ar peoc'h hag e garantez da
viken.

MEVEN

N'oun ket souezet an distera gant eur seurt ma-
delez aberz hor roue karet. Ni a ginnigo da Zoue,
hirio, pedennou a anaoudegez vat. Ha peur e teuo
Judikael ?

AR C'HOUNT

Abenn eur pennad. Deuet oun me ama, d'an
daou lamm, en e raok, evit rei da c'houzout d'eoc'h
e fell d'ezan ar roue dont d'ar manati eleac'h mont
en e balez.

KOLOMBAN

Ha perak'ta e fell d'ezan dont aman da genta ?

HERVE

Perak ? ne ket diez her gouzout, va breur. Judi-
kael, araok beza lekeat da roue, oa manac'h er
manati ma. Karout a ra evel kent, manati Gael,

hag e fell d'ezan trugarekaat an Aotrou Doue en
hon touez. *Da Veven*. N'eo gwir, va zad ?

MEVEN

Gwir hep mar ebed. Mat, va bugale, an ti ma
eo eun ti paour ; n'hor bezo da rei d'ar roue nemet
al lojennig dister ma chome enni gwechall.

AR C'HOUNT

Ar roue ne c'houlenn ken tra all, va zad. N'ema
ket pell diouzomp breman, ha mont a ran war e
arbenn.

KOLOMBAN

Ha ni d'hol labour, aotrou 'n abad, mar plij
ganeoc'h. *An holl a ya kuit, nemet Meven*.

III DIVIZ

MEVEN e unan.

Na perak'ta e fell da Judikael dont d'ar manati
ma eleac'h mont d'e balez a roue ? Daoust ha ka-
set e ve gant mouez an Aotrou Doue ? Daoust ha
c'hoant en defe d'en em lakaat a nevez e stad eur
manac'h paour evel m'oa gwechall ? Me vije re
vras va levenez, mar teufe d'hen ober, O Spered
glan ! O Spered Santel ! Skuillit ho sklerder war-
nomp. *O sellet warzu ar meaz*. Petra welan duhont,
nemet n'eo ar roue e unan o tont ama ? Doue karet !
Va c'haloun a drid gant eun aoun santel ! livirit
hoc'h unan d'in kemend a livirin d'ar roue.

IV DIVIZ

MEVEN, JUDIKAEL

JUDIKAEL *oc'h en em strinka war e zaoulun dirak Meven. Abad santel, roit ho pennoz d'in, me ho ped!*
Meven a ro e vennoz.

MEVEN

Savit, roue Judikael, savit tad ar beorien, savit salver ar vamm-vro.

JUDIKAEL, *o sevel.*

Me ne ket eur roue oun ; me ne ket salver ar vro oun ; an Aotrou Krist eo hor roue, an Aotrou Krist eo hor zalver ; ne d-oun me ken tra nemet e zervicher paour ; n'oun deut ama nemet evit e adori, evit e drugarekaat.

MEVEN

A zo gwir, ha me zo laouen bras ouz ho kwelet o tont aman e leac'h mont d'ho palez. N'ho peus ket ankounac'heat, a gav d'in, an amzer n'edoc'h nemet eur paour keaz manac'h evelomp ni. Daoust ha c'hoant ho pefe da veza, evel kent, unan ac'hanomp ?

JUDIKAEL

C'hoant bras, mez her beza ne c'hellan ket, siouaz ! abalamour d'ar Vretouned keiz, m'eo bet fellet d'ezo va lakaat da roue. Chom e stad a roue, setu aze ar pezh a rankan da ober, daoust d'in va zad, rak me a blijfe kalz gwelloc'h d'in beva en ho touez, evel m'her grean gwechall.

MEVEN

Daoust ha ne c'hellit ket lakaat ho kurunen a roue war benn Alan, ho mab kalounek ?

JUDIKAEL

Divezatoc'h, va zad. Va mab Alan, evitan da veza fur ha nerzus a zo gwall yaouank c'hoaz. Ouspenn ze, emoun o paouez peur ober an emgann, ha meur a dra bouezus a jom da ober c'hoaz evit lakat ar peoc'h etre roue ar Franked ha me *O sellet warzu ar meaz.* Sellit hoc'h unan, va zad, ha guelit ha n'eo gwir a lavaran d'eoc'h. Setu ma welan, du hont, o tont, etrezek ennomp, eun ofiser frank. Unan eus ar re genta eo etouez ofiserien roue ar Franked. Radber eo e hano : hen anaout a ran, o veza gwelet anezan epad ar brezel.

V DIVIZ

AN HEVELEP RE. RADBER.

JUDIKAEL

Hoc'h anaout a ran, Radber. Dont a rit, hep mar ebed, a berz roue ar Franked.

RADBER *o saludi gant doujans*

Ne ket me, aotrou roue, eo ar gwir gannad kaset davedoc'h gant va roue. Kannad roue Bro C'hall eo an aotrou Alar, eun den santel ha gwiziek meur-bed, eskob kear Noyon. Lekeat oun bet, hep ken, da heuilh an aotrou Alar. Hema a fellfe d'ezan beza digemeret ganeoc'h, aotrou roue.

JUDIKAEL

Bez 'e vezo. Livirit d'ezan dont ama, mar plij.
Radber. Radber a ya hag a zeu en dro dioc'htu.
Alar hag an dud ouz e heuilh a zeu gantan. Unan
anezo a zoug eur voestl aour fin, mein talvoudus
warni. Eun all a zoug eur pakad gwiskamanchou
laer a bep seurt liou.

VI DIVIZ

MEVEN, JUDIKAEL, RADBER, ALAR. *hag ar re ouz e*
heuilh.

ALAR

Aotrou roue, me eo kannad kaset davedoc'h gant
roue ar Franked. Me ho salud gant ar brasa doujans.

JUDIKAEL

Ha stoui a ran me dirazoc'h. Aotrou Alar, gant
eun doujans brasoc'h c'hoaz, p'eo gwir oc'h beleg
hag eskob zoken, a zo guell. *Judikael, Alar, Me-*
ven ha Radber a azez oc'h an daol. Ar re all a
jom en o za.

ALAR

Va c'hefridi, Aotrou roue, ne ket gwall ziez he
ober. Roue ar Franked, va mestr, a zo bras e
c'hoant da ober ar peoc'h ganeoc'h, ha, dreist holl
da gaout ho karantez. Rei a raio d'eoc'h, eus e du
e garantez leal evit mat. Mar d-eo, Aotrou roue,
ho c'hoant henvel ouz e hini, n'ho pezo ken da
ober nemet sina an daou lizer en deus Radber kaset
gant, ha m'eo lekeat, war bep hini anezo, skrid
eur garantez a bado da viken etrezoc'h ho taou.

Unan eus an daou lizer ma a jomo ganeoc'h,
egile ganen en hano va roue. *Radber a ro an daou*
lizer.

JUDIKAEL

Mil bennoz da viken d'an Doue a garit evel
m'her c'haromp hon unan. Hen eo a ro d'eomp an
eurusded a gaver er peoc'h hag er garantez. Sina
a ringant eur wir levenez. *Sina a ra an daou lizer.*

ALAR

Ha breman, evel ma reer atao, setu, roue ka-
lounek, donezonou a ro d'eoc'h ho mignoun roue
ar Franked Sevel *a ra ha kemeret an traou digant*
ar re a zoug anezo. Setu gwiskamanchou eus ar
re dalvoudusa great gant mezer fin eus broiou ar
zao heol. Setu eur voestlig aour melen great ganen
va unan, d'ar mare ma labourer war va micher a
orfeber. Hounnez a zo dispar he zalvoudegez, ne
ket, avat, abalamour dan aour, mez abalamour
d'ar pezh a gaver enni, da lavaret eo relegou ben-
niget, eun tammig euz eskern santel santez Jeno-
vefa, patrounez Paris.

JUDIKAEL

An donezon ma, aotrou 'n eskob, a vo evidoun
talvoudus en tu all d'ar re all. Ho trugarekaat a
ran a greiz kaloun, ha roue ar Franked ive. An
traou a zo echu, breman, etrezomp, ha mar d-oc'h
evit chom eur pennad er vro ma, me a roio d'eoc'h
kambchou em falez evidoc'h hag evit ho tud.

ALAR

Trugare d'eoc'h, aotrou roue; ne jomimp amañ nemet bete warc'hoaz, ha n'eus fors e peleac'h e vezimp, e nep leac'h ne vezimp gwelloc'h eget er manati ma, leun a vennosiou Doue. *Da Veven.* C'houi a blij d'eoc'h, tad abad, hon digemeret?

MEVEN

Eur vennoz nevez hor bezo, Aotrou 'n eskob ouz ho tigemeret. Ha goude m'eo bet great ker kaer ar stal etre Bro C'hall ha Breiz, daoust ha mat e kafech mont da japel ar manati da drugarekaat an Aotrou Doue?

— ALAR. —

Mat kenan, Deomp, va zad. *Endra m'ema an holl o vont kuit, Kolomban a zeu dre an tu all d'an teatr Meven a jom.*

VII DIVIZ

MEVEN KOLOMBAN

KOLOMBAN.

Eun den yaouank paour, va zad, a zo deut, bremañ, er manati, da c'houlenn diganeomp skoazel ha truez.

MEVEN

Perak?

KOLOMBAN.

Dre ma 'z eo bet gwall gaset gant soudarded. Chadennet eo, hag, ouspenn ze, klanv bras dioc'h a lavar

MEVEN

Ar re baour, ar re glanv, va mab, e peleac'h eo e vijent digemeret paneved en hon ti? Hon ti ni a dle beza ti an dud reuzeudik ha glac'haret. Daoust ha kavout a rajent en eul leac'h all kement zo red d'ezo ken evit o c'horfou, ken evit o eneoù? Me fell d'in her gwelet.

KOLOMBAN

Ema o c'hortoz e kichen an nor. Me ya da rei digor d'ezan. *Kolomban a ya, hag a laka Gweneal da zont. Gweneal a zo eur c'hoz tamm sae fall warnan; ema e zaouarn leun c'head ha stag mat outo eur jaden houarn.*

VIII DIVIZ

MEVEN, KOLOMBAN, GWENEAL.

GWENEAL.

Aotrou 'n abad, ho pet truez ouzin, soudarded zo hag a red war va lerc'h. Roit d'in, en han' Doue, eur c'houn bennak er manati, ma c'hellin en em guzet. Mirit outo na 'z afent d'am laza.

MEVEN.

Bez dinet'heñ neat, va c'heaz. Nep a zeu er gouent ma a vez hor skoazel gantan. *Kriadennou a fors er meaz.*

GWENEAL spountet.

Selaouit! Selaouit! emaint o tont aman; va faka a raint, a dra zur.

MEVEN.

Ne bakint ket, ne lazint ket ac'hanout.

KOLOMBAN.

Ni a lakaio, mar bez red, hor c'horfou dirazout. N'az pezh ket tamm aoun ebed. Ne gouezo ket eur vleven zoken diwar da benn. *Kriadennou krenvoc'h Ar prinz Hoel a zeu. gantan daou zoudard divalo, ruz o friou. Krial a reont o zri.*

IX DIVIZ

MEVEN, KOLOMBAN, GWENEAL. HOEL, AN DAOU ZOULDARD.

MEVEN, *rust ha krenv e vouez.*

Petra fell d'eoc'h ?

HOEL, *droug ennan.*

Kregi er paotr ze a zo eat kuit eus e brizoun.

MEVEN.

Ha perak' ta ho poa hel lekeat er prizoun, Hoel ? C'houi a wash bemdez er c'hiz se meur a baour, meur a zen diwar ar meaz. Hennez zo deuet aman da glask va skoazel. Ar manati ma eo eul leac'h sakr ma c'heller, ennan, rei o frankiz d'ar sklaved Me a ro e frankiz da Weneal hag a denn ar jaden ze dioc'h e zaouarn. *Meven a denn ar chadennou dioc'h daouarn Gweneal.* Ha difenn a ran ouzoc'h na rafec'h an distera droug d'ezan.

NIVIO X

HOEL, *kounnar ennan, o tostaat, hag o c'hourd-rouz Meven.*

Petra leverez ? Lavar adarre 'ta !koz vanac'h, lastez abadig pilpouz ma 'z out ! An den ze a zo d'in, hag her paka a rin.

MEVEN, *nerzus bras e vouez.*

Taolit evez, Hoel ! ema an ifern ouz ho kedal abalamour d'an torfejou a rit noz deiz e kenver an dud paour. Mar stokit ouz an den yaouank se, breac'h an Aotrou Doue a gouezo warnoc'h da rei d'eoc'h taol ar maro !

HOEL o. *c'hoarsin iud, ha kounnar ennan atao.*

Ha, ha, ha, ha ! breac'h an Aotrou Doue ! Hennez n'eus breac'h ebed gantan ! Piou en deus e nep leac'h gwelet breac'h ho Toue ! Mat ; me fell d'in her gwelet ! *Ober a ra eul lamm war Weneal da gregi ennan. Raktal e laosk eur griaden spountus hag e kouez hanter varo e dioreac'h ar zoudarded.*

KOLOMBAN, *spountet neat.*

Na spountusa tra ! va Doue ! Pebez kastiz skouerius ! Maro eo, va zad.

MEVEN.

N'eo ket maro mik, mes ne zaleo ket da vervel. Dougit anezan en eul leac'h all ; amzer zo, c'hoaz, marteze, da rei d'ezan e zakramanchou diveza. *An holl kuit nemet Gweneal.*

X DIVIZ.

GWENEAL, *e unan, o pidi, e zaoulagad saret
pouez an eno, e zaouarn kroaset.* Tad peurbadus,
tad madelezes, skuillit, me ho ped, ho kras nerzus
war an den a zo krog en e dremen van. Ho pezet
truez outan rak ne ouie ket petra a rea. Me a bar-
doun d'ezan. Pardounit ive hoc'h unan. *Judikael a
zeu goestad e goueled an teatr hag a jom a za.*

XI DIVIZ.

GWENEAL. JUDIKAEL.

JUDIKAEL.

Evit-piou, va mab, eo ar beden garantezus edoz
oc'h ober?

GWENEAL.

Evit eur paour keaz den o vont da vervel. Ema
Meven, an tad abad, o rei an nouen d'ezan.

JUDIKAEL.

Ra vezo ene an den ze digemeret gant an Aotrou
Doue. Mes te zo klanv e doare. Te zo drouk livet
da zremm ha leun c'hoad da zaouarn. Me a bareo
da glenved, me a walc'ho gouliou da zaouarn.

GWENEAL.

N'her grit ket ! Na stokit ket ouzin. Va c'hlenved
me a zo spountus ar spountusa ! e hano eo al lov-
rentez ! Mar stokit ouzin, c'houi bako an droug ha
mervel a reot.

JUDIKAEL.

Ne varvin nemet n'her gourc'hemmenno an Aotrou
Doue. Bez'ez eus aman dour ien ha lien fresk. Me
fell d'in gwalc'hi da c'houliou. Daoust ha klenved
ar paour n'eo ket klenved an Aotrou Jezuz ? Daoust
ha gouliou ar paour n'int ket gouliou an Aotrou
Jezuz ? Azez oc'h ar bank se. *Gweneal a azez.*
Judikael en em laka dirazan war e zaoulin. Gwal-
c'hi a ra daouarn Gweneal gant dour, hag o sec'ha
gant al lien gwenn. Ha breman ro d'in da zaouarn.
Poket a ra da zaouarn Gweneal o lavaret : Poket
a ran gant karantez da zaouarn paour, an eil hag
egile, o tere'hel sonj eus daouarn sakr hor Zalver
bet toullet gant tachou war ar groaz. Sao ha deus
ganen. Te zo skuiz maro gant da boaniou. Ober a
ri eur c'houk em c'hambrig. Eur c'hoz tamm
gwele n'eus ken enni. Me her ro d'it a greiz kaloun.
Deus, oanig Doue, deus breurig muia karet. *Judi-*
kael a laka Gweneal da vont en e gambr. Meven a
zeu dre an tu all, ha Judikael a zeu en dro.

XII DIVIZ.

JUDIKAEL. MEVEN.

MEVEN.

Meulomp ! Aotrou roue, meulomp da viken ma-
delez hon Doue. Ar prinz Hoel, mac'h anavezec'h
mat anezan abalamour d'e dorfejou, a zo o paouez
mervel evel eur zant, goude beza goulennet truez
evit e bec'hejou, ha digemeret gant karantez eun
eal, korf sakr hor Zalver benniget.

JUDIKAEL.

N'eus netra, va zad, a ve gwelloc'h d'hor c'haloun eget enr pec'her, o tistrei oc'h Doue. Koumpren a ran breman ; gwelet em eus aman bremaik eur paotrig keaz, e zaouarn leun c'hoad, a bede a wir galoun evit eun den gwall glanv, a lavara. An den ze eo Hoel ez oa.

MEVEN.

Just ; Hoel en doa paket ar paotrig se ha great d'ezan mil boan a bep seurt. O veza deut ar paotrig da glask sikour aman, miret em boa ouz Hoel na rafe d'ezan droug ebed. Fellet oa bet da Hoel her paka evelato, hag hel laza marteze, mes Doue a skoas pounner gant Hoel. Ar prinz a gouezas evel pa vije maro, hag an dremenvan a grogas ennan kerkent. Dre c'hraes Doue, salvet eo ene ar prinz paour ze, fizians am eus ; mont a ran adarre da gichen e gorf maro ; eun tamm skoaz a roin d'e zebelia.

GWENEAL *er c'hambrig*.

Judikael !

JUDIKAEL.

Selaouit ! ar paotrig eo ouz va gervel. Daoust ha klanvoc'h e ve ? *Meven a ya kuit*.

GWENEAL, *er c'hambrig atao*.

Judikael ! Chom aze eun tamm d'am gortoz.

XIII DIVIZ.

JUDIKAEL, JEZUZ.

JUDIKAEL.

Chom a ran, va c'heazik. Deus d'am c'haout. *Jezuz (Gweneal) a zeu ; gwisket eo gant eur zae wenn kann, bleun aour dispar outi. Bez' ez' eus eur c'helc'h aour en d'ro d'e benn. Judikael en em strink war bennou e zaoulin.*

JEZUZ.

Sell ouzin, va Judikael karet. Sell ouz da Zoue Jezuz. Gweneal, ar paotrig ac'h eus gwelet ha great vad d'ezan, a oa me, Daouarn Gweneal oa va daouarn me. Ar pokou ac'h eus roet d'ezo, o roet ec'h eus d'am daouarn me. O veza karet Gweneal, me eo ac'h eus karet.

JUDIKAEL.

Dare oun da vervel gant al levenez, va Jezuz ! Tridal a ra va ene gant eur garantez virvidik. Na petra rin me, va Doue, evit plijout d'eoc'h, evit ho trugarekaat evel a rankan ?

JEZUZ.

Kemeret da zae a vanac'h, evel gwechall. Ema Meven o tont. Meven eo eur zant bras. En em ziskouez em eus great d'ezan evel d'it, Judikael. Dont a ra eus va ferz, da zae wenn gantan.

JUDIKAEL.

Laouen e vezo ouz he rei d'in a nevez, va Jezuz, mes ne vezo ket laouennoc'h egedoun me.

XIV DIVIZ.

JUDIKAEL, JEZUZ, MEVEN *o tougen sae wenn*
Judikael. Meven en em laka war e zaoulin da adori
Jezuz. Sevel a ra goude eur pennadig.

JEZUZ.

Tenn da vantel ha da zae a roue, Judikael. *Judikael a denn.* En em wisk gant sae ar venec'h, glan evel da galoun. *Judikael a laka ar zae vanac'h.* *Judikael ha Meven en em laka war o daoulin dirak Jezuz, an eil a gleiz, egile a zeou. Jezuz a zav e zaouarn a ziouto.* Ho pinniga a ran ho taou, va zent karet. Va gwelet ne reot mui, hiviziken, nemet er baradoz. Me ho kar. *Jezuz a ya kuit goustad, war e gil, o sellet atao outo. P'eo eat kuit, Herve ha Kolomban a zeu. Judikael ha Meven a zav. Klevet a reer eur c'hloc'h o sem kaer a bell.*

JUDIKAEL, MEVEN, KOLOMBAN, HERVE, MENEC'H

ALL.

MEVEN.

Kloc'h ar manati a zon pedennou dioc'h an noz. Deomp da bidi, va breudeur. Ar beden n'eo ken tra nemet ar baradoz war an douar.

Benedicat vos omnipotens Deus, Pater, et Filius, et Spiritus Sanctus.

AN TRI ALL *a unan.*

Amen !

AR GOEL A ZISKEN.